

KROAZ OR ZALVER

Komzou : Job an Irien

Muzik : Mikael Skouarneg



1. Kroaz or Zal - ver ho - peus ___ heu - liet
 2. Gwal - het oc'h bet gand gwad ___ Je - zuz
 3. Ka - ran - tez Je - zuz 'zo ___ 'vi - doc'h
 4. 'N e ga - ran - tez ka - voc'h ___ ho tud
 5. War an treu - zou e vo ___ on Tad



1. Gan - tañ 'peus treu - zet ar ___ ma - ro.
 2. Ma - get gand e gorr e - vu - ruz.
 3. En e bar - don e - ma ___ ar peoc'h.
 4. En o c'hi - chenn ho Mamm ___ Ma - ri.
 5. Pa zi - go - ro 'vi - dom ___ an nor.



1. Kroaz or Zal - ver ho - peus heu - liet
 2. Gwal - het oc'h bet gand gwad Je - zuz
 3. Ka - ran - tez Je - zuz 'zo 'vi - doc'h
 4. 'N e ga - ran - tez ka - voc'h ho tud
 5. War an treu - zou e vo on Tad



1. E groaz d'ho kas d'ar ba - ra - doz.
 2. E gorr d'ho kas d'ar ba - ra - doz.
 3. E ga - ran - tez d'ho kas ___ d'ar peoc'h.
 4. En e ga - lon e vo ___ ho ti.
 5. D'on di - ge - mer gan - (n)eoc'h ___ da vad.

1. Kroaz or Zalver ho-peus heuliet
 Gantañ 'peus treuzet ar maro.
 Kroaz or Zalver ho-peus heuliet
 E groaz d'ho kas d'ar baradoz.
2. Gwalhet oc'h bet gand gwad Jezuz
 Maget gand e gorr evuruz.
 Gwalhet oc'h bet gand gwad Jezuz
 E gorr d'ho kas d'ar baradoz.
3. Karantez Jezuz 'zo 'vidoc'h
 En e bardon ema ar peoc'h.
 Karantez Jezuz 'zo 'vidoc'h
 E garantez d'ho kas d'ar peoc'h.
4. 'N e garantez kavoc'h ho tud
 En o c'hichenn ho Mamm Mari.
 'N e garantez kavoc'h ho tud
 En e galon e vo ho ti.
5. War an treuzou e vo on Tad
 Pa zigoro 'vidom an nor.
 War an treuzou e vo on Tad
 D'on digemer ganeoc'h da vad.

LA CROIX DE JESUS

1. Tu as suivi la croix du Seigneur Avec Lui tu as traversé la mort. Tu as suivi la croix du Seigneur Que sa Croix t'emmène au paradis.
2. Tu as été lavé par le sang de Jésus Nourri de son Corps bienheureux. Tu as été lavé par le sang de Jésus Que son Corps t'emmène au paradis
3. L'amour de Jésus est pour toi, Dans son pardon se trouve la paix. L'amour de Jésus est pour toi Que son amour t'apporte la paix.
4. Dans son amour tu trouveras les tiens A leur côté la Mère Marie. Dans son amour tu trouveras les tiens Son cœur sera ta maison.
5. Notre Père sera sur le seuil Quand s'ouvrira pour nous la porte. Notre Père sera sur le seuil Pour nous accueillir avec toi pour toujours.